

TROIAD

SINEMA E BREZHONEG EVIT AR SKOLIOÙ
KENURZHIET GANT DAOULAGAD BREIZH

DOZER AR SKOLAERIEN
Kinniget gant Daoulagad Breizh

Ur film bevaat
sevenet gant Claude Barras

SOVAJED

2024 / lezh27 / Suis - Frañs - Belgia / Haut et Court
Aduouezhiañ e Brezhoneg: Dizale



En doser-mañ e kavoc’h ar respontoù da fichenoù ar skolidi ha kinnigoù abadennoù da gas er c’hlas war-lerc’h bezañ bet gwelet ar film. Evel-just, an holl draoù a vo kavet en doser-mañ n’int nemet kinnigoù, deoc’h da azasaat an abadennoù d’ho c’hoantoù, d’ho ezhommoù, ha da ezhommoù ha c’hoantoù ar skolidi !

Digoradur

- 1/ Diverrañ ar film 3
- 2/ Kinnig ar film 3
- 3/ A-raok ar skignadenn : eskemm diwar-benn ar skritell 4

Labour gant ar vugale

- 1/ Kompren an istor 5
 - a/ An tudennoù : piv eo piv ?
 - b/ An div dudenn bennañ : Keria ha Selai
 - c/ Lakaat ar skeudennoù en urzh
 - d/ Komprenet’ p eus an istor ?
- 2/ E pelec’h emaomp ? 7
 - a/ Enezenn Borneo / Ar forest trovanel gleb
 - b/ An orangoutan
 - c/ Ar Penaned : piv int, penaos e vevont ?
- 3/ An diforestañ 11
 - a/ Petra eo an diforestañ ?
 - b/ An eoul palmez
 - c/ Hon efed war an en-dro : petra a c’hellomp ni d’ober, amañ ?
- 4/ Ur preder war an disheñvelder 13
 - a/ Bezañ disheñvel : darempred Keria ha Selai
 - b/ Piv eo ar “Sovajed” ?



1/ Diverrañ an istor

E Borneo, war lez ar c'hoad trovanel, ez eus bet repuget un orang outan bihan gant Keria. Kavet eo bet er blantadeg gwez-palmez ma labour he zad enni. Krak d'ar mare ma tegouezh he c'henderv yaouank Selai da glask bod en o zi a-benn pellaat ouzh ar c'henstourm a zo savet etre e familh kantreidi ha tud an embregerezh koadourien. Selai, Keria hag an orangoutan bihan a zo vont da skoilhañ ouzh distrujerien koadeier o hendadoù, en arvar da vezañ diskaret mik. Ha Keria, evel-se, a zesko hiroc'h diwar-benn he re.

2/ Kinnig ar film

“Sovajed” a zo eil film hir Claude Barras, war-lerc'h “Me Kourjetenn”, deuet maez e 2016, a oa bet advouezhiet e brezhoneg ivez.

“Sovajed”, evel “ Me Kourjetenn”, a zo filmoù bet savet e stop motion. Setu amañ ul liamm evit mont da welet ur rann Na petra 'ta diwar-benn ar stop motion evit komprenn gwelloc'h penaos e ya en-dro :

https://www.youtube.com/watch?v=t0MIC_1L4k8&ab_channel=France3Bretagne

Palioù ar film a zo liesseurt : lakaat da huñvreal gant skeudennoù forest vurzhudus Borneo, lakaat da c'hoarzhin gant troioù-kamm hon harozed, bezañ frommet gant an diaesterioù kavet war an hent, met ivez prederiañ, war hor plas war an Douar, war hon darempred gant an Natur, ha war ar pezh a vez distrujet gant an Dud.

Peadra da gaout kaozeadennoù dedennus er c'hlas war-lerc'h ar film !

Claude Barras a zo bet e Borneo evit prientiñ e film. Tremenet 'neus amzer gant ur familh a vev evel hini Selai, er forest, evit kaout skeudennoù tost deus ar gwirionez, memes ma 'neus empennet ur bern traoù evel-just.





3/ A-raok ar skignadenn : eskemm diwar-benn ar skritell

Evit sikour ar vugale da vezañ muioc'h enbarzhiet er film pa voc'h er sinema, brav eo eskemm en a-raok o sellet deus ar skritell asambles.

Setu ul listenn goulennoù evit sikour !

- Peseurt tudennoù a vez gwelet ? Petra emaint oc'h ober ? Ouzh petra emaint o sellet ? Peseurt tro-spered a zo ganto ? Penaos int gwisket ? Peseurt perzhioù boutin o deus, ha petra 'zo disheñvel etrezo ? Peseurt darempred a zo etrezo ? d'ho soñj ?
- Pelec'h emaint ? Petra a vez gwelet tro-dro dezho ? Daoust hag e tremen an istor e Breizh ? Pelec'h neuze ?
- Da beseurt mare deus an deiz ?
- Peseurt trouzioù a vez klevet d'ho soñj ?
- Petra a zo skrivet ouzh ar skritell ? (An titl, anv ar sevener,...) Petra dalvez an titl-se ? Petra er skritell a seblant liammet gant an titl ?
- Gant tout an dra-se, galloud a rit empennañ un tammig petra a dremen er film ?





LABOUR GANT AR VUGALE

1/ Kompren an istor

Evit gellet eskemm war ar film, ezhomm 'zo kaout soñj dioutañ. Pouezhus eo kemer amzer evit degas da soñj d'ar vugale eus elfennoù an istor, ha gwiriañ eo bet komprenet gant an holl.

a/ Piv eo piv ? (FICHENN 1)

Liammit an diskrivadenn gant an dudenn a zere !

Ur plac'h yaouank on. Emaon o chom e kêr gant ma zad. Ma mamm 'zo marv. Degemer a ran ur babig marmouz.

→ **Respont : Keria**

Ur babig marmouz on. Lazhet eo bet ma mamm, degemeret on gant ur familh tud.

→ **Respont : Oshi**

Un paotrig on, Emaon o chom er forest, met kaset on da di ma c'hendervez e kêr, peogwir eo dañjerus din chom gant ma familh dre fazi ar goadourien.

→ **Respont : Selai**

Ur gwaz on, Emaon o chom e kêr gant ma merc'h. Labourat a ran evit ar goadourien.

→ **Respont : Tad Keria**

Ur gwaz kozh on. A viskoazh on bet o chom er forest. Difenn a ran ma douaroù, a zo re ma hendadoù.

→ **Respont : Tad-kozh Keria**

Ur vaouez on, biologourez eo ma micher. Divizet 'meus chom da vevañ er forest trovanel.

→ **Respont : Jan**

b/ An div dudenn bennañ : Keria ha Selai (FICHENN 2)

E penn-kentañ an istor, ur vuhez disheñvel mik 'zo gant Keria ha Selai ! Piv a ra petra ? Lak ur groaz er respont mat !

Respontoù :

a vev e kêr → **Respont : Keria**

a vev er forest → **Respont : Selai**

a ya da chaseal → **Respont : Selai**

a ya d'ar skol → **Respont : Keria**

a gousk en ur gwele → **Respont : Keria**

a gousk dindan ul lamin-toro → **Respont : Selai**

a zo gwisket gant ur berrwisk → **Respont : Selai**

a zo gwisket gant ur gwiskamant skol → **Respont : Keria**

a gomz div yezh → **Respont : Selai**

'neus ur pellgomz hezoug → **Respont : Keria**



ch/ Lakaat ar skeudennoù en urzh (FICHENN 3)

→ **Respontoù:**

- ① Keria hag he zad a zegemer Oshi, ur babig marmouz, peogwir eo bet lazhet e vamm
- ② Selai a zeu da vevañ ti Keria
- ③ Tec'hout kuit a ra Selai evit distreiñ d'e gampadur
- ④ Keria en em goll er forest o klask adtapout Selai
- ⑤ Keria, Selai hag Oshi a dremen un nozvezh er forest
- ⑥ Oshi a zo dantet gant un naer
- ⑦ Keria a zebr gant familh Selai ha Jan
- ⑧ Ar goadourien a zistruj kampadur familh Selai
- ⑨ Keria a lak karr-samm ar goadourien da darzhañ
- ⑩ Ur vamm Orangoutan nevez 'vez kavet gant Oshi

d/ Komprennet 'peus an istor ? (FICHENN 4)

Respontoù :

1 → **Respont : B**

Petra 'zo c'hoarvezhet da mamm ar babig marmouz Oshi ? Lazhet eo bet gant soudarded.

2 → **Respont : CH**

Perak e teu Selaï da chom e ti e gendervez Keria ? Peogwir en deus c'hoant e dad-kozh da wareziñ anezhañ diouzh ar bec'h etre ar Penaned ha tud ar plantadeg.

3 → **Respont : A ha B** (ouzhpenn ur respont a zo posubl)

Perak e tiviz Selaï distreiñ er forest ? Peogwir ez eus bet graet goap outañ gant bugale all er skol ha Peogwir n'eo ket bet Keria jentil gantañ.

4 → **Respont : B ha CH**(ouzhpenn ur respont a zo posubl)

Perak e vez distrujet ar forest ? Evit gwerzhañ koad ar gwez. Evit plantañ gwez palmez d'ober eoul

5 → **Respont : A**

Petra 'vez graet gant Keria pa verzh n'he deus ket a rouedad er forest ? Krapañ a ra gant ur wezenn evit klask kaout rouedad en-dro.

6 → **Respont : CH**

Piv a 'zo dantet gant un naer ? Oshi.

7 → **Respont : A**

Peseurt micher a vez graet gant Jan ? Biologourez.

8 → **Respont : CH**

Kinniget 'vez arc'hant gant tud ar plantadeg evit prenañ douaroù digant ar Penaned. Petra 'vez graet gant an arc'hant-se gant ur vaouez Penan ? Ober a ra titich war ar bilhidi

9 → **Respont : B**

Peseurt armoù a vez implijet gant ar Penaned ? Strinkelloù.

10 → **Respont : A**

Penaos eo marvet mamm Keria ? Drouklazhet eo bet peogwir edo o tifenn ar forest.

11 → **Respont : A**

Petra oa loen-totem mamm Keria ? Ur banterenn.

12 → **Respont : B**

Penaos e teu Keria a benn da sikour ar Penaned ? Lakaat a ra ur video war ar rouedadoù sokial.



2/ E pelec'h emamp ?


a/ Enezenn Borneo / Ar forest trovanel gleb

Tu 'zo kregiñ o lec'hiañ enezenn Borneo war kartenn ar Bed.

Borneo a zo un enezenn vras-tre, e penn all ar Bed e-keñver Breizh, e kenvandir Azia. Borneo 'zo anv an enezenn, n'eo ket hini ur vro. Teir bro disheñvel a zo e Borneo : Malaysia, Indonezia (an daou se a zo ouzhpenn e Borneo, peogwir int strolladoù inizi) hag ar Brunei.

Kinnig d'ar vugale lec'hiañ broioù anavezet gante marteze tro-dro da Vorneo : Aostralia, Thailand, Sina, Indez,... Hag ar meurvioù : Indian deus un tu, Habask d'an tu all.

Borneo a zo war ar c'heheder, evit an abeg-se eo tomm du-se. Evel an holl inizi a zo a live gant ar c'heheder, Borneo a zo gleb a-drugarez d'ar glav a gouezh kalz, klaz muioc'h evit e Breizh ! An hin-se, tomm ha gleb, a vez añvet hin trovanel, peogwir e vez kavet seurt hin tro-dro d'ar c'heheder, etre an div drovan. (E glas amañ dindan)



Af	BWh	Csa	Cwa	Cfa	Dsa	Dwa	Dfa	ET
Am	BWk	Csb	Cwb	Cfb	Dsb	Dwb	Dfb	EF
Aw	BSh	Cwc	Cfc	Dsc	Dwc	Dfc		
	BSk			Dsd	Dwd	Dfd		

Ul lodenn vras deus enezenn Borneo a zo goloet gant forestoù trovanel. Ar forestoù-se a zo pinvidik-mor a-fed plantoù ha loened. An en-dro a zo deus ar c'hentañ evito : tomm eo an amzer a-hed ar bloaz, hag ar glav a gouezh puilh. Ul lodenn vras deus al loened hag ar plant a vez kavet du-se ne vezont kavet e lec'h all ebet : ne c'hellont bevañ nemet er forestoù trovanel.

Ar c'hoad trovanel brudetañ a zo an hini brasañ : an Amazonia, en Amerika ar Su. Met bez ez eus re all, evel hini Borneo da skouer, met ivez forestoù trovanel Afrika hag Aostralia.



Al loened er forestoù trovanel (FICHENN 5)

→ Respontoù :

Trovanel	Ket
Ar banterenn zu	Ar mank
An orangoutan	Ar vuoc'h
An toukan	Ar bleiz
Ar boa	Ar c'hañval
Ar c'holibri	Ar bleiz mor
Ar c'hrokodil	

b/ An orangoutan (FICHENN 6)

An orangoutan a zo ur spesad marmouz bras, a vev en inizi Borneo ha Sumatra. Beviñ a ra er forest trovanel gleb. Al lodenn vrasañ deus e amzer a dremen er gwez, o klask boued.

An orangoutan en deus blev rouz/ruz o liv. Divrec'h hir-tre en deus.

E vent a zo etre 1m10 hag 1m40, e bouezh etre 40 ha 90kg.

Debriñ a ra dreist-holl frouezh, met ivez plant a-wechoù, hag amprevaned.

An orangoutan a zo ur bronneg. Ar pazed o deus ur babig bep 8 bloaz tamm-pe-damm.

Gwechall-gozh e veze dioute war un dachenn kalz brasoc'h, bremañ ne vezont kavet nemet war inizi Borneo ha Sumatra. An orangoutan a zo en arvar bras da vont da get, dre fazi an diforestañ, hag ar cheñchamant hin. Posubl eo ne vefe ket dioutañ mui a benn un nebeut degadoù a vloavezhioù.





ch/ Ar Penaned

Ar Penaned a zo ur bobl a-orin deus enezenn Borneo. Bez ez eus war-dro 10 000 anezho hiriv an deiz. En doare hengounel e vezont kutuilherien chaseourien : da lâret eo e vevont gant ar pezh a vez dastumet ha chaseet gante en natur, ha kandreidi, da lâret eo ne vevont ket en un ti a chom bepred er memes lec'h, met fiñval a reont er c'hoad evit kavout boued. Cheñchet eo o mod buhez tamm-ha-tamm, ha bremañ al lodenn vrasañ deus ar Penaned a vev e kêriadennoù bihan etrezo. Met un nebeut familhoù a vev c'hoazh evel o hendadoù, o kantreal, evel familh Selaï.

Chaseal a reont dreist-holl gant ur strinkerez, a vann biroù ampoezonet (ar poezon a zo sabr ur wezenn).



Selaï gant e strinkerez

Abaoe 30 vloaz bennak, ar Penaned a zo o stourm evit gellat kenderc'hel da vevañ evel m'o deus c'hoant, gant o boued, o sevenadur, o c'hredennoù. Klask a reont gwareziñ ar forest, a zo o zi, hag a vez lakaet en arvar gant an diforestañ. Kement-se a zo gwir evit an holl bobloù a vev e mod-se er Bed a-bezh.



Ar Penaned (FICHENN 7)

Evel-just e vo kalz muioc'h a skouerioù evit mod Breizh da vevañ eget evit hini Selaï, peogwir e anavezont kalz muioc'h ar mod beviñ-se. Kavet e vo ganeoc'h e fichenoù ar skolidi un nebeut skeudennoù deus ar film evit degas da soñj dezho eus traoù 'zo.

Sellit en-dro deus ar mare-se deus ar film evit kaout soñj : senenn ur pred penan (teul senenoù filmoù da adwelet)

→ **Respontoù :**

Un nebeut skouerioù respontoù (evel-just ez eus ur bern respontoù all!)

	Breizh	Penan
Lec'h kousket	<i>Un ti</i>	<i>Kampadur, savet gant ul lamin-toro</i>
Boued	<i>Toazenoù, chokolad,... Prennet er gourmarc'had,...</i>	<i>Ar pezh a vez kavet er c'hoad : loened (moc'h, sarpanted,...), pesked, plant...</i>
Deskadurezh	<i>Er familh hag er skol</i>	<i>Gant tud ar meuriad, deskiñ a ra ar pezh a zo ezhomm evit beviñ er c'hoad : chaseal, anavezout ar plant,...</i>
Dilhad	<i>Tee-shirt, bragoù,...</i>	<i>Ur bernwisk</i>
Dudioù	<i>Sinema, football,...</i>	<i>Sonerezh hengounel, met ivez sonerezh a-vremañ !</i>

Tu 'zo ijinañ un eskemm etre ur bugel deus Breizh hag ur bugel Penan, pep hini o lâret tout ar pezh a blij dezhañ en e mod da vevañ. Marteze ne vo ket aes kavout arguzenoù deus tu ar bugel Penan, tu 'zo sikour ar vugale o kinnig dezho un nebeut re : al liamm gant an Natur (anavezout an holl loened, an holl blant, gwelet anezho a dost), ar frankiz (nompas kaout da vont d'ar skol), bevañ en ul lec'h pell deus ar saotradur (an aer 'zo propr, n'eus ket trouz an otoioù,...), tremen kalz amzer gant o familh, ...

Ar pal a zo lakaat da gompren n'eus ket ur mod bevañ "gwelloc'h" evit egile. Disheñvel int, pep hini en deus e duioù fall ha mat. Met tu 'zo da ijinañ pegen start eo bezañ rediet da cheñch mod buhez pa n'eo ket un dibab.



3/ An diforestañ

a/ Petra eo an diforestañ ? (FICHENN 8)

An diforestañ a zo ar fed da droc'hañ gwez ur c'hoad, evit sevel e plas ur park evit gounid plant a vo gwerzhet war-lerc'h. E Borneo e vez plantet gwez palmez da skouer.

Ouzh ar skeudenn, lakaat ar skolidi da ziskouezh : Ar forest trovanel, ar forest diskaret, ar plantadeg gwez palmez.

Tu 'zo kinnig d'ar vugale ober un dresadenn a-raok / war-lerc'h. Evit sikour e c'hellont listennañ an holl draoù a vez gwelet er film, er forest trovanel deus un tu, er plantadeg deus an tu all. Adkavit er fichennoù evit ar skolidi un nebeut skeudennoù deus ar film, ha fotoioù, evit sikour. Ha setu amañ un nebeut skouerioù ma vo ezhome sikour.

A-raok : An holl blant disheñvel, kemmesket, gant livioù, mentoù, stummoù a bep seurt, an holl loened, ar stêrioù,... War-lerc'h : kefioù ar gwez troc'het ha berniet, ar mekanikoù a droc'h ar gwez, an dud o troc'hañ koad gant an heskennerez, al loened o tec'hout kuit, ar Penaned o klask difenn ar c'hoad

Tu 'zo prederiañ asambles war efedoù an diforestañ war ar plant (er plantadegoù n'eus nemet ur seurt plant, gwez palmez, er c'hoad ez eus miliadoù a blantenoù disheñvel,...), war al loened (rediet int da dec'hout kuit, n'o deus lec'h ebet evit beviñ, na boued mui, nebeutoc'h nebeutañ a blas 'zo evito, mont a reont da get,...), ha war an dud o veviñ er c'hoad, evel ar Penaned (rediet int da vont kuit, beviñ e kêrioù padal n'o deus ket c'hoant, n'o deus ket boued mui, na plant evit bezañ pareet,...)

Adalek al labour-se, tu zo eskemm war an abegoù a lak ar Penaned da stourm evit gwareziñ ar forest, evit gwelet m'int bet komprenet mat.

Hag ar pennad-mañ :

https://www.lemonde.fr/planete/portfolio/2019/01/14/en-malaisie-si-on-detruit-la-foret-de-sarawak-c-est-notre-ame-que-l-on-detruit_5408833_3244.html

b/ An eoul palmez (FICHENN 9)

An Eoul Palmez a zo un eoul tennet diouzh ar frouezh a vez kavet er gwez palmez. Ar gwez palmez a gresk en hinoù trovanel.

An eoul palmez a zo an eoul a vez implijet ar muiañ er Bed. Da gentañ peogwir eo marc'had-mat-tre da broduiñ, met ivez peogwir eo aes-tre da implijout : tu 'zo mirout anezhañ e-pad pell amzer, ha n'eo ket re zourek.

Evit an abegoù-se e vez implijet kalz an eoul palmez evit fardañ boued industriel : gwastili, toazoù da ledañ, dienn-skorn, diennoù. Met implijet vez an eoul palmez ivez evit produoù ar sal dour (gel emwalc'hiñ, ruz muzelloù,...). Memes en eoul-tan a vez lakaet en otoioù e vez kavet eoul palmez ! Gant div vro nemetken e vez produet 85% deus eoul palmez ar bed : Indonezia ha Malayzia (Borneo a zo ul lodenn deus an 2 vro-se). Al lodenn vrasañ deus an eoul palmez-se a vez ezporzhiet, da lâret eo kaset da vroioù all, dreist-holl broioù pinvidik, evel re Europa hag Amerika an Norzh.

Produiñ eoul palmez a zegas kalz diforestañ, peogwir e vez diskaret ar forest trovanel evit plantañ gwez palmez.



An eoul palmez a zo an eoul a vez implijet ar muiañ er Bed → **Respont : gwir**

Ker-tre eo da broduiñ → **Respont : gaou**

Servijout a ra dreist-holl da vouetañ ar chatal → **Respont : gaou**

Servijout a ra da fardañ boued industriel → **Respont : gwir**

Servijout a ra da fardañ eoul-tan an otoioù → **Respont : gwir**

En Indez hag e Sina e vez produet al lodenn vrasañ deus an eoul palmez → **Respont : gaou**

Al lodenn vrasañ deus an eoul palmez a vez ezporzhiet → **Respont : gwir**

c/ Hon efed war an en-dro

Ur wech komprenet mat penaos e ya en-dro an diforestañ, e c'heller prederiañ war ar pezh a c'hellomp ober.

Ar pal a zo lakaat ar vugale da gompren efed hor mod da vevañ war an en-dro. An holl draoù a vez debret gante, a vez implijet gante, a zo bet krouet en ul lec'h bennak er Bed, hep na ouifent penaos resis, na gant peseurt efedoù el lec'h produiñ.

Ret eo diwall amañ nompas bezañ kenteliour.ez. Ar pal n'eo ket lâret e vezer drouk o tebriñ tra-mañ-tra, an traoù a zo kalz luzietoc'h evit se, pep hini a ra ar pezh a c'hell er Bed lec'h ma vevomp. D'ar gelennerien.ezed da nompas disoñjal ez eus abegoù ekonomikel a lak familhoù 'zo d'ober dibaboù e-keñver ar boued a vez prenet gante. Evit an abeg-se eo suroc'h kemer skouerioù gant ar boued a vez kavet er c'hantin.

Tu 'zo ober ul labour enklask war etiketennoù ar boued a vez kavet er skol, evit gwelet hag ez eus eoul palmez e-barzh. Tu 'zo prederiañ war orin ar boued a vez debret er c'hantin : ar bananez, ar chokolad, pe c'hoazh ar frouezh hag al legumaj a vez debret da vareoù pa ne greskont ket sañset nepell deus amañ. Tout-se a zo bet savet e broioù all, alies broioù paouroc'h evit hon hini, gant efedoù a c'hell bezañ grevus-tre war en-dro ar broioù-se.

Tu zo prederiañ asambles war ar pezh a c'hellfe bezañ implijet e plas ar produioù fall evit an en-dro : peseurt boued 'neus an efed bihanañ war an en-dro ? Ar boued simplañ (n'eo ket treuzfeurmet, pe an nebeutañ posubl), en deus beajet an nebeutañ (e Breizh e kresk kalz avaloù da skouer !), hag na vez ket bannet.

Dedennus eo kaozeal eus an efed a c'hell kaout pep hini. Memes ma 'neus pep den un pouezh bihan-tout, seul vuioc'h a dud a vo oc'h ober strivoù, seul vrasoc'h e vo an efedoù ! Met ar strivoù hinienel n'int ket trawalc'h, ret eo ivez d'ar gouarnamantoù kemer o c'hiriegezhioù.

E liamm gant ar film 'zo bet lañset ul lec'hienn internet gant ur bern mennozhioù traoù d'ober evit sikour. Hervez pep kelenner.ez da welet ma n'em sant en e.he aes da gaozeal deus se e klas, pe gant ar familhoù.

<https://www.sauvages-lefilm.com/>



4/ Ur preder war an disheñvelled

a/ Bezañ disheñvel (FICHENN 10)

Sellit en-dro deus ar mare-se deus ar film evit kaout soñj : senenn e porzh ar skol (teul senennoù filmoù da adwelet)

- Darempred Selai ha Keria

Unan deus palioù ar film “Sovajed” a zo degemer an disheñvelled. E penn-kentañ ar film, Keria ‘zo drouk gant Selai, a zo disheñvel diouti. Tamm-ha-tamm, Keria ‘zo vont da sellet dreist he raksoñjoù, evit dizoloiñ he c’henderv, e vod da vevañ, hag ar sevennadur Penan, a zo ivez hec’h hini, memes m’eo bet troc’het diouti.

Kinnig a reomp deoc’h labourat war ur senenn bouezhus er film evit kompren an dizegemer. Er senenn-se, mignonezed Keria a ra goap deus Selai, lakaet diaes peogwir emañ er skol evit ar wech kentañ. E-lec’h difenn he c’henderv, Keria a ra goap ivez deus Selai.

Setu senario ar senenn-se, ha tri c’hinnig labour adalek ar senenn.

- Dielfennañ ar senenn

Ur wech lennet ar senenn gant ar gelenner.ez, ha labourer asambles war ar geriaoueg evit bezañ sur eo bet komprenet mat pep tra, setu un nebeut goulennoù da brederiañ asambles. Bewech ‘zo meur a respont posubl !

- Perak vez graet goap deus Selai gant mignonezed Keria ?

- Penaos e reont goap outañ ? (Respontoù posubl : keñveriañ a reont anezhañ ouzh ul loen, lâret a reont ez eus ur «goueziad» anezhañ.

- Penaos en em santfec’h o vezañ e plas Selai ?

- Ha penaos en em santfec’h o vezañ e plas Keria ? Perak d’ho soñj ne zifenn ket Selai, hag e tiviz ober goap dioutañ ?

- C’hoari ar senenn :

Ar pal amañ a zo dont a-benn da embann tro-spered an tudennoù dre an ton implijet. Ma vez ezhomm ez eus tu ouzhpennañ gerioù en destenn evit diskrivañ ar mod da zispakañ pep frazenn : lakaet diaes, goapaus, diseblant, fuloret, heuget,...

Evit lenn a vouezh uhel ez eus ezhomm da gaout 4 bugel, ma vez c’hoariet ar senenn ez eus tu ouzhpennañ tudenn Selai. An dudenn-se ne lâre netra, met tu ‘zo diskouezh e frommoù dre e emzalc’h, e jestroù, e zremm,... Kement-se a c’hell lakaat an dudenn-se da vezañ diaes da c’hoari evit ar vugale, met dedennus eo klask diskouezh ez eus ur bern fromoù a dremen hep bezañ lâret.

- Cheñch ar senenn

Ha bremañ, deoc’h c’hwil da ijinañ un fin all evit ar senenn ! Ur tammig e mod an “teatr forum”, tu ‘zo deoc’h lakaat ar vugale da brederiañ war ar mod ma c’hellfe tremen an traoù en un doare all, pozitiveloc’h. Penaos ‘nije Keria gallet ober mod all ? Ma vijec’h bet en he flas, petra ho pefe graet ? Petra ‘n ije Selai gallet ober mod all ? Adalek ar preder-se, ez eus tu skrivañ ur stumm nevez deus ar senenn, ha c’hoari anezhañ.

Ur wech graet al labour-se, tu vo klask kaout soñj deus penaos e cheñcho an darempred etre Selai ha Keria. Penaos e teu da vezañ an darempred-se ? A-drugarez da betra e cheñch an traoù tamm-ha-tamm ?



b/ Piv eo ar Sovajed ? (FICHENN 11)

Tu 'zo kregiñ gant ur preder war ar ger "Sovajed". Klask gerioù heñvelster (feuls, didruez, sot,...), hag ar gerioù enep-ster (desket, sevenaet, fur,...)

Tu zo prederiañ ivez war ar pezh a vez anvet "Sovaj" : tud, loened, plant, lec'hioù,...

Er film, ar ger-se a zo en titl, ur ger pouezhus eo neuze. Implijet e vez anezhañ gant tud disheñvel en istor, evit komz deus tud disheñvel.

→ **Respontoù :**

- **Tad Keria** a gomz deus ar goadourien 'zo o paouez lazhañ mamm Oshi.
- **Mignonezed Keria** a gomz deus Selai ha deus ar Penaned.
- **Paotr ar blantadeg** a gomz deus an dud a-orin deus Borneo, n'int ket gwenn eveltañ.
- **Selai** a gomz deus e familh Penan.

Gwelet 'vez e vez implijet ar ger «sovaj» evit komz deus ar penaned kenkoulz eget deus ar goadourien Tu 'vo sikour ar vugale da brederiañ war ar pezh a zo gouez, pe sevenaet. Daoust hag eñ e vezer sevenaet o vezañ gwisket gant ur roched ha bragoù, hag o kousket en un ti ? Pe o toujañ deus al loened, deus an natur ha deus ar re all, memes ma 'z int disheñvel ?





Teuliad azasaet gant Manon Renault
Diwar an doser pedagogel savet gant Zero de conduite - www.zerodeconduite.net
Adlennet gant Lena Catalan Marcos, kempennet gant Marianne Larvol

Gouzout hiroc'h war ar film war :
<https://www.hautetcourt.com/animation/sauvages/>

DAOULAGAD BREIZH
13 straed/rue Michel Le Nobletz 29100 DOUARNENEZ
02 98 92 97 23 - contact@daoulagad-breizh.org - www.daoulagad-breizh.org

